

AVEL HON LENNEGEZH O C’HWEZHAÑ (55)

Gwalarn, lec’h ma timez hon lennegezh vrezhoneg gant he stummoù liesseurt. Moarvat eo ar varzhoniezh an elfenn bennañ. An danevelliñ en devoa e lec’h ivez. Met, ken skoet ma oa bet gwalarniz yaouank gant an dister ma oa ar varzhoniezh kent o donedigezh... Ken emskiantek all ma oant o welet er varzhoniezh banniel kentañ hon lennegezh : marteze, en un doare diemskiant ha c’hoazh n’eo ket ken sur a se, e welent sklaer eo ar varzhoniezh hag a chom pan varv pep tra. Ar varzhoniezh a dreuz an hoaladoù, ar varzhoniezh eo an elfenn lennegezh barnet a-hed ar wezh. Ar c’homz-plaen a chom, evel just, met arz ar sevel karmoù da ezteurel e drivliadoù eo ar mistr. Ken dister e oa ar varzhoniezh kent, harpet war ar gwashañ klichedoù : klichedoù bet laeret ent-naturel digant ar sevenadur gall. N’eus anv ebet, ne oa anv ebet a zispriziañ ar sevenadur gall, nann, met ar pezh a oa bet laeret eo ar pep gwashañ. Sujet d’ar rim, d’ar glotenn – ha dilezet an enklotenn hengounel hag a c’halle talañ ouzh pec’hedoù hon barzhoniezh kozh - , sujet d’ar skeudennoù re voutin, re vaget gant bedoù re c’hortozet. Ar varzhoniezh-se ne souezhe den, ar varzhoniezh-se a roe d’an dud ar pezh a oa da c’hortoz diganti. Hep kontañ pouez ponner hengoun an Natur krouet gant Doue...

Barzhoniezh *Gwalarn* zo bet ur varzhoniezh disuj, koulz er mennozhioù koulz er stummoù : mennozhioù ur vro anterin, ur vro a c’hoanag, stummoù barzhonegañ digarkanet diouzh alioù reut an dornlevrioù sevel gwerzioù. Un tarzh.

Padal zo ur Jakez Kerrien, gwalarnad berrbad, bet prederietoc’h gant ar stumm a-raok pep tra : ar glotenn. En 1927 ec’h embannas daou bennad, unan war *Gwalarn*, hag ur regennad bennak anezhañ war Feiz ha Breiz. Un doare da ziwalarniñ moarvat. Echu gant fulenn varzhus ar Roc’h Toull... Ret dezhañ dibab e garkan. Siwazh dimp, ha siwazh dezhañ, forzh petra a vefe hon soñj....

Daoust da se eo mat derec’hel d’ar pezh a skrive :

« an taol-mouezh a rank skeiñ war ar glotenn ; silabennoù toniet ha re zidon n’int ket evit klotañ : ar c’hleved en difenn groñs ; ar bobl er sant hag a dreuztonio ar ger evit gallout klevout ar glotenn ; ar varzhed a yezh estren a youc’h deomp gwitibunan. Silvidigezh ebet d’ar werzaouriezh nemet dre an taol-mouezh o pouezañ war ar glotenn. ». An taol-mouezh, unan eus elfennoù pennañ hon yezh, unan eus an elfennoù bet stourmet outi gant politikerezh an trevadenniñ...

Pell e vezer diouzh ar gwerzaouiñ dieub avat, bet deraouet gant hon C’halloc’h da skouer. Ur gwerzaouiñ o tigarkaniñ ar stumm da reiñ muioc’h a bouez d’ar varzhoniezh.

Sede, terriñ ar stumm evit dieubiñ an danvez. Troellenniñ komz-plaen ha barzhoniezh. Evel displeget kaer gant hon Roparz :

« ...diwar-benn ar c’hemm etre lavar-plaen ha barzhoniezh. Diskouez a rafen n’eo ket ur c’hemm e gwirionez. Kentoc’h : n’eo al lavar-plaen nemet un hinienn e-touez neuizioù diniver ar varzhoniezh. Evel end-eeun m’eo ar c’helic’h un hinienn e-touez neuizioù kromm diniver. Hogen, aon am eus, ne vefe netra deoc’h nemet c’hoari goullo ar spered.

Furoc’h din echuiñ evel-henn : n’eus e nep lec’h na lavar-plaen na barzhoniezh digemmesk. E pep oberenn ez int kejet ken na c’heller ket o rannañ. En doare m’hon eus tizhet amañ ar wirionez, nemet dre zilezel ar gwirvoud ur wezh c’hoazh. »

Un hinienn e-touez neuizioù diniver ar varzhoniezh, tizhout ar wirionez... Ur sell hollek war hon lennegezh. Ar stumm en servij an danvez da rentañ trivliadoù, prederoù, goanag. Ar stumm da strukturiñ ar pezh zo anvet lennegezh.

« Ar varzhoniezh a amprest peurliesañ ur stumm mentadurel ha sonerezhel, rak gant se e komz ouzh ar galon ; ouzh an amemskiant, kentoc’h eget ouzh ar spered. Hogen ar gwerzennoù n’int ket atav barzhoniezh. N’eus forzh petra a c’hell bezañ lakaet e gwerzennoù, adal gourc’hemennoù Doue betek sekredoù-keginerezh., hep dont da vezañ barzhoniezh. » Eme hon Arzel, ma Arzel evit gwir.

Dres ! Ha n’eo ket se statud mojennoù fablennoù Yann ar Feunteun ? Statud al lâred barzhoniezh kentgwalarnat ?

Ar varzhoniezh zo un dra all.

« Seul vantrusoc'h e oa m'eo ar brezhoneg ur yezh donezonet-dispar evit ar varzhoniezh : pouezmouezh kreñv ha sonerezhel, leunder ha liesseurtiezh an dibennoù, aes ober gerioù nevez hag o lakaat da heuliañ tanavañ plegoù an awen, gant ur c'hentrollad dispar a rakgerioù hag a c'hourfenngerioù. Ganet eo avat ar varzhoniezh vrezhonek gwirion, a laka da dalvezout an holl binvidigezhioù-se *evit dasorc'hiñ hor c'hoant a Gened..* »

« ...ar varzhoniezh ma kendalc'h da vezañ ar pezh a dle bezañ : dishualerez donañ hor bezoud, dizoloerez gwir natur an Hollved, kuzhet ouzhimp gant breskter hor skiantoù kig. » emezañ c'hoazh.

« Ar varzhoniezh d'am meno n'eo ket da gentañ un doare da lavarout hor soñjoù gant gerioù uhel pe dibabet-kaer ha lec'hiet ampart gant rimoù a bep seurt, n'eo ket ar gwerzaouiñ ; hogen un doare da welout ha d'en em glevout. Hollwelerezh, hollgleverezh eo ar Varzhoniezh e-keñver ar gomz-palen a glask distrollañ, disrannañ, digej. Eeunwelerezh ha kenwelerezh eo ar Varzhoniezh. Ar barzh eo an hini a oar keñveriañ boudoù disheñvel ar bed en unvaniezh un hevelep selladenn, an hini oc'h arvestiñ etre ar boudoù o-unan evel etrezañ hag int-i, darempredoù kuzh ha dianav d'ar re all. Goude-se, n'eus forzh peseurt stumm-displegañ a vo implijet gant ar barzh, barzhoniezh a vo en e oberenn. » Eme hon Maodez. Komzoù prizius ha don a-berzh unan eus hon brasañ barzhed.

Kement ha mont pelloc'h c'hoazh, ar pezh a skrive Per Denez :

« Burzhud *Gwalarn* a zo marteze bezañ kavet hent ar gened en ur glask hent ar vro. Rak, m'o deus skridoù ar mare-se, evel lien-skramm, ar vrogarantez atav bezant ha birvidik, tizhet o deus, en tu-hont dezhi, pe, reishoc'h, en diabarzh anezhi, karantez an dud, ar merc'hed, an traoù. Hag e-kichen *Pedenn ar Varc'hegourien*, e-kichen *Mervel a rin...* e kavomp *Serr-noz* krenidik Jakez Riou, *geneth* Kerverzhioù o kanañ sklinton ha, gant Youenn Drezen, mousc'hoarzh leun a heol ar vro-vigoudenn. Barzhoniezh a vuhez hag a yec'hed. »

Serr-noz

Azet e oa war lez an aven,
O c'hortoz an hini a gare.
Uhel e oa an heol pa zegouezhas er glen.
...En-dro dezhañ e noze.

En halegoù e bleuñv ar vilzig a oa tavet ;
War gorre ar c'hegid gwenn en nadoz-aer a vorede,
hag eñ a c'hortoze
ar plac'h na zeue ket.

milzig : milc'hwid

E bevenn ar c'hornôg e taskrene ruzoni,
Skeud ar c'hegid gwenn a varve e-barzh an dour,
Lano blot ar vorenn a bigne lizidour.
Hag eñ a welas e oa o noziñ.

Sevel a reas goustad,
Kemerout a reas en-dro gwenodenn an dorgenn,
Hag an heol o vervel a skuilhas en aven
Ur veradenn wad.

Jakez Riou (1931)

Y mae'r eneth...

: emañ ar plac'h...

Emañ ar plac'h yaouank o kanañ en he zi,
ha mouezh ebet war glev er bed en-dro dezhi
nemet a-bell va c'halon, a zaoulamm
evel un ebeul pennfollet.

Ul lamm,
ha me hag azezañ 'n he c'hichen, hag e tav
ar c'han.

Kanit ! sederat levez, pa sav
stivell sklinton, glan evel strink, ho mouezh !
Kanit ! netra par d'ar ger bev.

E-touez
reustl ha strafuilh ar bed, avel glouar ha fresk
ho komzoù karantez, â vaouezed, a gresk
ezhomm dianzavus hon ene kriz
a zouster hor c'helc'hfe, didrec'hus ha dibriz,
ha digavus, allas ! digavus er bed-mañ...

« Daoust hag ur pok am bo bremaik ma kanan ? »

Kerverziou (1930, kinniget da F. R. Meavenn)

An div varzhoneg-se a ouezen reiñ d'am studierien, dezhe d'o studiañ pervezh. Gwashoc'h
barzhonegoù da studiañ zo ! Ha n'em eus tamm keuz.

Mintin war an erin

Kaniri 'z eus gant an tarzhig war e vili.
Lirzhin eo ar mintin ha sklinton an erin.
- Mani garet, ken gwenn ha flour da izili,
Klev tirili an alc'hweder en oabl livrin.

Sin eo chourig an aer, e-giz dour er c'hili,
War hun difiñv an Atlantel hag e gevrin,
Ha yaouankiz an heol a luf e askilli
War hun ar mor, etre kornôg hag an aod krin.

Â joa ec'hon ar mor hag an heol, bam hor bro !
C'hoarzh an avel, ken sart, o vrudañ tro-war-dro,
Nevez atav, lid diziwezh o dimeziñ !

Ni, 'vat, ne vrago ket hor yaouankiz atav !
En em garomp timat, bevomp hon eurioù brav,
Hep mui gortoz listri neñvel an Inizi !

Youenn Drezen (1934)

Ur gwir vanifesto bevañ ! Bevañ war an tomm, bevañ hep preder ha n'eo ket dibreder !
Mousc'hoarzhin ouzh ar vuhez. Gwerzennoù laouen hon Youenn.
Ret e oa d'hon barzhed veur digejañ ar pezh a ra talvoudegezh hon barzhoniezh, hon lennegezh.
Trugarekkat dezhe. Netra da lâret ouzhpenn.
Hon barzhed *Gwalarn* a oa skrivagnerien voden eus ar modernañ, met ivez prederourien ar
varzhoniezh : he stumm, ya, met dreist pep tra, ur varzhoniezh da zegas buhez ha yec'hed, evel ma
skrivas Per Denez.
Kement hini a skriv brezhoneg herie an dez zo dleour dezhe...

Herve Bihan

Levrlennadur

Roparz Hemon, *Stumm ar Varzhoniezh*, Gwalarn, Niv. 12, 1927, pp. 74-79.

Jakez Kerrien, *Ha reizh eo ar werzaouriezh vreizhek*, Gwalarn, Niv. 12, pp. 62-66.

Jakez Kerrien, *Kentañ Kentel ar Barzh yaouank* – Ar glotenn e brezhoneg, Feiz ha Breiz, N° 12, 1927, p. 47.

Jakez Kerrien, *Kentelioù d'ar barzh yaouank*, Feiz ha Breiz, N° 2, 1928, pp. 56-58.

Jakez Kerrien, *Kentelioù d'ar barzh yaouank*, Feiz ha Breiz, N° 4, 1928, pp. 143-146

Jakez Kerrien, *Re am bije karet ar brezhoneg – Oberenn glok*, dre aket Bernez Rouz, Al Liamm, 2026.

Maodez Glanndour, *Gant hentoù meur ar gwerzaouañ*, Sav, Niv. 18, Diskaramzer 1940 / Goañv 1941, pp. 31-45.

Maodez Glanndour, *Gant hentoù meur ar gwerzaouiñ*, Dre Inizi ar Bed Kletiek, Al Liamm, 1991, pp. 131-148.

Arzel Even, *War lestr-hud ar varzhoniezh*, Gwalarn, Niv. 152-153, pp. 452-461.

Jakez Riou, *Barzhonegoù*, Al Liamm, 1954.

Kerverziou, *Barzhonegoù*, Al Liamm, 1955.

Barzhaz Gwalarn, Gwalarn, Niv. 66, mae 1934.